



Bec'h d'ul loen

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv ?

Adalek ar CP en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

- Mestroniañ ar c'horf
- Bezañ aketus

Pal ar c'hoari

anavezout e anv hag erruout d'ar pal hep bezañ tapet gant ar re all
Doare da c'hoari

ur regennad a vez graet gant ar c'hoarierien. Pep c'hoarier a zibab anv ul loen hag hen lavar d'ar penn-c'hoarier nemetken. (Ar c'hoarierien all n'o deus ket d'hen gouzout). Rener ar c'hoari a huch : « bec'h d'an azen ! »

an azen en deus da dec'hel kuit ha tapout ar pal hep bezañ tapet gant ar c'hoarierien all. Gallout a ra mont kuit diouzhtu, gortoz ur berrig amzer, evit c'hoari un dro gamm d'e enebourien.

ur c'hoarier adtapet gant ar re all a goll ur poent